



RECIT

COMPOSET A NEVE

VOAR UN TOL VAILLANTIS

ERRUET A DOST DA BARIS,

Er bla 1839, an 3 a vis Meurs.

Voar un ton neve.

ME ho ped, assistantet, da glevet recitan,
(Ma-unan hon estonet dimeus a guement-man,)
Ar pez a so arruet var ar c'hopi gallec.,
Mar gallan gout ar feçon d'ho zrei en brezonec.

Mes, gent avanç davantach, e c'houllan sclerigen,
Digant ar Speret-santel, da riman pen-da-ben
Qement gir a so scrivet var ar c'hopi gallec,
Ha d'ho esplican facil d'an oll en brezonec.

(2)

Ur vreg yaouanc magueres, o tistrei a Bariz,
 Bet e qerc'hat ur buguel eus a dy ur bourc'his
 Da gass ganti da vagan en toes he bugale,
 Evit sicour o zevel ha gonit bara dê.

Dre ur c'hoat e renc tremen o vont da gaout ar guer
 Hac eo bed attaqet, siouas! gant ur voler,
 Hac en guisqet en belec, o tont d'e bonjouri:
 Ar goad en e goaziet a deu da remui.

Bonjour, e me an den-man: erru oc'h, ma greg vad.
 Ha dec'h-u pareillamant, emei, autrou'n Abbat!
 Souet hon ous o goelet aman o pazeal,
 Rac ar c'hoad-man so brudet da vean un doull fall.

Doue, eme al laer-man, a breserv pep-hini:
 Me so aman o vale da n'eum disenoï,
 Hac e meus ma flijadur, o c'hortos overnia;
 Da laret ma breuvial na deu den d'am zroubla.

O qerzet en he c'hever, en deus interrojet
 Da c'hout a belec'h e teue ha pelec'h e oa bet,
 O voelet e oa ganti var e brec'h ur buguel,
 Hac en guisqet ar c'haeran, casi evel un AEll.

Goude en deus goulennet outhi incontinent-
 Ha ne devoa bet netra evit avançamant,
 O qemeret ar buguel da zicour e soigni,
 Da denna ar virione, mar galje, diganti.

Eus, emei, autrou'n Abbat, arc'hant em eus touchet:
 Cânt leur em eus recevet evit e guemeret,
 Nemert ma meus ar greden e collin ma bue,
 Qent mont emes ar c'hoad-man, an innoçant ha me.

(3)

Na sonjet qet gement-se, emean, ma greg vad;
 Me a vo dec'h compaignon da vont er mes ar c'hoad;
 E zoc'h gant ar c'habiten, n'ho pezo droug ebet,
 Nemert ma renqet rentan ar pez o c'heus touchet.

A zidan e soutanen e tennas ur zabren
 Hac e savas anezi ractal a us d'he fenn,
 Hac e c'houlennas ganti ar yalc'h pe ar vue,
 Ha laret dean pelec'h e deus lacqet ane.

Plasset e meus aneze en dro d'an innoçant;
 Goel e ganen ma bue evit aour nac arc'hant.
 Caët a ret aneze o tont d'e zispaca
 Ha lest ma bue ganen hac e-hini gantan.

Cregui a ra er buguel en ur memeus instant,
 Evit tont d'e zispacan da guemer an arc'hant:
 Dre bermission Doue e tappas ar zabren,
 Ha gant un tol, dre vonheur, en deus rannet e benn.

Hep m'en deus bet an amzer da guemer an arc'hant,
 E ranqas mervel eno er plaç, subitamant,
 Hac ar vreg hac ar buguel dre viracl so rentet
 Voar an hent bras pareabl, ep m'ho deus droug ebet.

Tri gendarm a erruas hac o deus goulennet,
 O velet ar goad onthi, petra oa erruet,
 Hac e deveus ispliqet diraze pen-da-ben
 En devoa lazet ar mestr dimeus ar volerien.

Dont a reet ganemp-ni, emeze, var ho qis,
 Evit ma elfomp goelet ar mercq ho vaillantis.
 Pa oue fouillet an den-man, eo e armo cavet,
 Diou bistolen a daou-den, ur zabren, ur sifflet.

(4)

P'ho devoa gret ho ingal hac ho proces-verbal,
Unan demeus ar gendarm a c'hoez enni ractal,
Hac en em rentas pevar deus e gamarado
Da velet ho c'habiten var an douar maro.

Pa veljont an habijo e fellas d'e tec'het;
En um renta a ranqont pe deuan da vervel,
Ha lezel ho garotti hac o c'has dar prison:
En Paris e recevont ho c'hondaonation.

Hac ar vreg hac ar vuguel so conduit dar guer,
He vaillantis so brudet ebars en peb qarter.
An hini en deus invantet distrei ar ganouen
A chom en parros Pleuyel; e hano YAN AR GUEN.

FIN.